

WAR KENT AMZERIOU BREIZH

95

Komzou ha sonerezh gant Olier GUYON

« Ar gwir en arbenn d'ar bed »

(Ger-stur an Drouzed)

Lusk ur c'han bale



Aet kuit gwe__chall eus ar Re --- ter. A dreñv de --




zho an am_ze_riou kent, Hon hen_da-dou, e pep a_ber, Treu_zet gan --



- to ar mor di_vent, A zi -- les -- tras eus o bi -- gi, -- Gan_to drou-




- i_zed o fo -- blad, Trec'h voent d'ar c'hoadou, d'ar blei -- zi: Se tu di_a --



- zez hor bro --- ad. Ar gwir a youc'hin ta d'ar bed, En deiz, en



noz, hiz_iv, be -- pred, din -- dan an nenv ha sell Dou_e: Breizh a zo pobl hag



e -- ne! Ha pep tra vat me a zal_c'ho: Gwir a --- tav! a --- tav!

Evit echuin

_i _zed o fo _blad, Trec'h voent d'ar c'hoadou, d'ar blei _zi: Se tu di _a _
 _zez hor bro _ _ _ad. Ar gwir a youc'hin 'ta d'ar bed, En deiz, en
 noz, hiz _iv, be _ _ pred, din _ _ dan an nenv ha sell Dou _ e: Breizh a zo pobl hag
 e _ ne! Ha pep tra vat me a zal _ c'ho: Gwir a _ _ _ _ tav! a _ _ _ _ tav!

I

Aet kuit gwechall eus ar Reter,
 A-dreñv dezho an amzerioù kent,
 Hon hendadou, e pep aber,
 Treuzet ganto ar mor divent,
 A zilestras eus o bigi,
 Ganto drouized o foblad,
 Trec'h voent d'ar c'hoadou, d'ar
 bleizi:

Setu diazez hor broad.

DISKAN

Ar gwir a youc'hin 'ta d'ar bed,
 En deiz, en noz, hiziv, bepred,
 Dindan an nenv ha sell Doue:
 Breizh a zo pobl hag ene!
 Ha pep tra vat me a zalc'ho:
 Gwir atav!

II

Dedennet gant brud hon douar,
 Rom, divergont, a berc'hennas Breizh,
 Ha latin an trec'hour Kesar
 A zeuas da argas hor yezh;
 N'eus forzh! hepdale, eus tramor,
 Tud eus hor gouenn a zigouezhas,
 Gant chal ar mor, e bro Arvor
 Hag ar yezh keltiek a renas.

III

Hon tud, a-hed ar c'hantvedou,
 En em gannas ha, 'vit o bro gaer,
 A stourmas, o kas d'al laeziou
 Gallaoued faos ha Saozon taer.
 Trugarez d'o nerzh-kalon vras,
 Ar rouaned hag an duced,
 Er frankiz, da vat a sturias, . . .
 Betek dez teñval an eured!

(Diskan)

IV

Abaoe an argad euzhus,
 Allas, Breizhiz bepred a labour
 Evit eurvad ha brud dalc'hus
 Ar poblou all... hag a chom paour!
 Soudarded pe vartoloded,
 Pe visionerien, er bed holl,
 A ziskouezh d'an dud estlammet
 Ene glan Breizh oa vont da goll!

V

Setu, erfin, diwezh an noz,
 Bennozh Doue! hag an deiz salver
 A sav bremañ; ha douar kozh
 Hon tadou a zasson seder!
 Eus ar mor, d'ar menez, d'al lann,
 Ar c'harmadenn a red tro dro:
 "War sav! Bretoned, d'an emgann.
 Gant ar sent hag evit ar vro!"

(Diskan)